

---

# Devezh mat

Devezh mat deoc'h holl  
Pa 'n erruan er skol



Kenavo pe ken arc'hoazh  
Pa guitaan ar c'hlas



Mar plij ha trugarez  
'Lâran pa vez ar mare



Ur bugel seven on  
N'eus ket gwelloc'h 'vidon.

*Michèle Kerrain*

---

## Al lapin laer

Met petra 'n deus graet al lapin bihan  
Met petra 'n deus graet o tont eus Kawan ?



Laeret 'n deus bara hag un tamm amann,  
Laeret 'n deus bara e ti Marijan.



Petra 'zo bet lâret d'al lapin bihan  
Petra 'zo bet lâret 'vit ar bara-amann ?



Ret 'vo dit paeañ 'vit ar bara-amann  
Ret 'vo dit paeañ ar baour-kaezh Marijan.



Debret ar bara, lipet an amann,  
N'hellan ket paeañ, ne 'm eus ket arc'hant.



Debret ar bara, lipet an amann,  
Ha ne chom netra gant ar baour-kaezh Marijan.

*J.M. Salomon*



---

## Unan, daou, tri

Unan, daou, tri,  
Penaos 'vo 'n amzer Mari ?



Pevar, pemp, c'hwec'h,  
Marteze 'vo erc'h,



Unan, daou, tri,  
Penaos 'vo 'n amzer Mari ?



Seizh, eizh, nav,  
Marteze 'vo glav.

*J Berthou*

## Anna Vari

En ur dremen e-biou d'he zi (2 w.)

Em Doa gwelet Anna-Vari

Hag em Doa goulet diganti (2 w.)

Un tamm bara amann da zebriñ.

En ur serriñ ar prenestr (2 w.)

**He** 'Doa respontet din : “Ma mestr,  
Kae da welout Mari-Charlot  
Ma 'z peus c'hoant kaout bara kompot.”

*E. Seznec*

# Ar c'hazh hag al logodenn

Sioul, e-kreiz ur park bras,  
E-kichen ur wezenn,  
E komze ur pezh kazh  
Gant ul logodenn.

“Petra ’teus graet hirie ?”  
A c’houlenne ar c’hazh  
“Me ’zo aet da vale  
’Kichen al lenn vras.”

“Ha te petra ’teus graet ?”  
’Lâre al logodenn,  
“Feiz, me ’m eus chaseet,  
E-kichen al lenn.”

“Piv ’teus chaseet,  
Aze ’kichen al lenn,  
Laboused pe besked,  
Pe ur valafenn ?”

“Ne oa ket ar pesked,  
Memes ur valafenn,  
Ne oa ket laboused,  
’Met ul logodenn”

“Ul logodenn, sur out,  
Unan just evel don ?”  
“Unan just evel dout,  
Unan a-feson”

Just e-kreiz ur park bras  
E-kichen ur wezenn  
’C’haloupe ur pezh kazh  
Gant ul logodenn.

*J. M. Salomon*



---

## Un ti bihan

Me 'm eus un ti bihan  
A zo glas, a zo glas,  
Me 'm eus un ti bihan  
A zo glas ha melen.

Te 'teus un ti bihan,  
A zo glas, a zo glas,  
Te 'teus un ti bihan  
A zo glas ha melen.

Eñ 'n deus un ti bihan  
A zo glas, a zo glas,  
Eñ 'n deus un ti bihan  
A zo glas ha melen.

*J. M. Salomon*



---

## Ar marc'h du

Kavet 'n deus ar marc'h du  
Bro an trenioù  
Trenioù glas ha trenioù ruz  
Leun a vagonioù.



Ne vo ket trist ken  
Ar marc'h du bihan  
Gant tout e vignoned  
O c'hoari, o pourmen.



Ur bern traoù 'n deus gwelet  
En ur veajiñ  
Otoioù, kirri-nij  
Hag ur bern bigi.

*J. M. Salomon*

## Ur chignan glas

Ur chignan glas, ô  
Àr an hent pras, ô  
'Heje e benn  
Dirak ur logodenn.

Al logodenn, ô  
Er fozellenn, ô  
'Heje e lostig  
Dirak ar chignanig.

# Dek den du

Dek den du,  
Dorn ha dorn,  
'N un dro dañs  
Difeson  
É sailhal d'al lein  
Get an droug-dent.



Kant kazh kamm  
Kozh ha klañv  
Krabanoù dezhe  
'El kranked  
É kraziñ krapouezh  
E kreiz-kêr



Mil mell marc'h  
Mac'hagnet  
Mouest o moue  
'El ar mor  
Mac'het mein dehe  
Eit ar manac'h



Yer àr yun  
Yaouank ha yac'h  
Àr yoc'h teil  
'Kreiz al liorz  
É tebriñ yod yen  
Da Yaou Bask



Dek den du  
Kant kazh kamm  
Mil mell marc'h  
Yer àr yun  
S'tu ar bed é troiñ  
Hag e troay.

*K. Ollivier, F. Hubert*

---

'E            evel  
E troay    e troio  
É troiñ    o treiñ

# Enora

Enora, Enora,  
Poent eo mont da gousket bremañ } (2 w.)



Echu 'ta da dammig bara (3 gw.)  
Ha selaou 'ta !



Enora, Enora,  
Poent eo mont da gousket bremañ } (2 w.)



Lak buan 'ta da bijama (3 gw.)  
Ha selaou 'ta !





Enora, Enora,  
Poent .....


*Mark Kerrain*




## O tont en-dro

 O tont en-dro eus ar marc'had  
Pe'r aval ruz, peder berenn  
'Oa ganin-me e ma chupenn  
Toullet e oa ma zamm dilhad  
Koue'et un aval, koue'et ur berenn.

O tont en-dro eus ar marc'had   
Tri aval ruz ha teir berenn  
'Oa ganin-me e ma chupenn  
Toullet e oa ma zamm dilhad  
Koue'et un aval, koue'et ur berenn.

 O tont en-dro eus ar marc'had  
Daou aval ruz ha div berenn  
'Oa ganin-me e ma chupenn  
Toullet e oa ma zamm dilhad  
Koue'et un aval, koue'et ur berenn.

O tont en-dro eus ar marc'had   
Un aval ruz hag ur berenn  
'Oa ganin-me e ma chupenn  
Toullet e oa ma zamm dilhad  
Koue'et an aval, koue'et ar berenn.

M. Kerrain  
J. Berthou



# Daou gloc'h kozh

Daou gloc'h kozh  
En em glemm douzh div fun



Div fun gozh  
En em glemm douzh 'r c'hloc'hour



'R c'hloc'hour kozh  
En em glemm douzh daou gloc'h



Daou gloc'h kozh .....

*K. Ollivier  
F. Hubert*





# An Tad Nedeleg

A pa dosta miz an Azvent  
E tihun an Tad Nedeleg  
Hag eñ da gargiñ e vouteg  
En ur soñjal kemer an hent

*Diskan* : Mall 'vo dit-te monet  
'Chomez ket, 'chomez ket  
Mall 'vo dit-te monet  
Chomez ket da gousket  
Ret 'vo dit-te nijal  
'Chomez ket, 'chomez ket  
Ret 'vo dit-te nijal  
'Chomez ket da ruzal.

A siminal da siminal  
Pounner e samm, berr e anal  
Edan an erc'h edan ar glav  
Krommet e gein e ya atav.

*Diskan*

Ne golla ket biskoazh kalon  
Rak plijadur 'r vugaligoù  
Pa gavint o c'hoarielloù  
Nag ur c'hoñfort eo evitoñ.

*Diskan*

(Kamilh Ollivier, Guy Le Bideau,  
Armelle Boullé, Mireille Carel,  
Marilou Pochic, Francis Hubert )

---

Evitoñ	<i>evitañ</i>
Ne golla	<i>ne goll</i>
Ruzal	<i>ruzañ</i>



# Nedeleg

Nedeleg 'zo 'tont, Nedeleg 'zo 'tont (2 w.)



'Tal an tan 'chomomp, 'tal an tan 'chomomp (2 w.)



Profoù 'vo 'vidomp, profoù 'vo 'vidomp (2 w.)



Laouen-tre 'vefomp, laouen-tre 'vefomp. (2 w.)

*J. M. Salomon*

---

## **Pelec'h emañ an Tad Nedeleg ?**

Pelec'h 'mañ an Tad Nedeleg ? (3 gw.)  
Emañ c'hoazh 'kreiz ar stered



Emañ o kargañ e stlejell (3 gw.)  
'Vit dont amañ a-raok pell.



War an douar e tiskenno (3 gw.)  
Dre 'r siminal 'tremeno.



Profoù a vo 'vit pep hini (3 gw.)  
Ha plijadur 'leizh an ti.

*M. Kerrain*

---

# Nedeleg laouen

Gwelet em eus e kêr  
Ur wezenn Nedeleg  
A skede he gouloù  
Hag he garlantezioù

*Diskan* : Nedeleg laouen  
 Nedeleg laouen  
D'an holl.

Gwelet em eus un den  
Gantañ ur vantell ruz  
A roe madigoù  
Ha kouignoù a-wechoù.

*Diskan* 

Gwelet em eus an erc'h  
A c'holoe ar vro  
Ar vugale vihan  
O c'hoari war an hent.

*Diskan* 

*J. Merien*



---

# Kenavo

Kenavo bloaz kozh milliget

Tralalalala lala lala



Kae 'ba' 'n toull ac'h eus meritet

Tralalalala lala lala



Ar bloaz nevez 'bado pelloc'h

Ha sur a-walc'h a vo kalz gwelloc'h

Kenavo bloaz kozh milliget

Tralalalala lala lala






---

## Da vintin pa savan


Da vintin pa savan (2 w.)

*Diskan* : 'Welan ma zad  
 'Welan ma mamm  
'Welan ma c'hoar  
Ma breur Iwan  
Hag ar c'hazh bihan !


Da greisteiz ha pa zebran (2 w.)

*Diskan* 

Ha da noz e-tal an tan (2 w.)

*Diskan* 

Ha d'an hañv ha d'ar goañv (2 w.)

*Diskan* 

*J. C. Le Ruyet*

---

# Ur maligorn

Ur maligorn edan ar glav (3 w.)

*Diskan* : Fall eo an amzer,  
'benn arc'hoazh 'vo brav. 🐣

Daou valigorn edan ar glav (3 w.)

*Diskan* 🐣

Tri maligorn edan ar glav (3 w.)

*Diskan* 🐣

Pevar maligorn edan ar glav (3 w.)

*Diskan* 🐣

J. C. Le Ruyet



# Meurlarjez

*Diskan* : Meurlarjez 'zo ur paotr gae  
Me 'garfe 'vije bemdez .

Gwelet 'm eus un olifant  
Gant ur chupenn c'hloan  
Hag ur vuzhugenn  
'Lipat ur skornenn.

– *Diskan* 

Dañset em eus plin  
Gant ur furlukin  
Hag ar gavotenn  
Gant ur varrikenn .

– *Diskan* 

Kavet 'm eus ul lapin  
Hennezh a oa fin  
Hag ivez un azen  
Gant divskouarn melen .

– *Diskan* 

Merzet 'm eus ur c'hañval  
Gant lunedoù orjal  
O sellet douzh an houad  
O klask e votoù-koad .

– *Diskan* 

J. Merien,  
K. Ollivier



## Ur yarig wenn

Me 'm eus ur yarig wenn é c'hor (3 gw.)  
'N un enezenn e-kreiz ar mor



Ha hi a lâr ne savo ket (3 gw.)  
Ken na vo bras he foñsined



Ken na vo bras ar bihanañ  
Ma c'hellay nijal e-unan



Ma c'hellay nijal e-unan  
Treuziñ ar mor 'd ay ket d'an deun.



---

## **Al laouenanig**

Fustañ, fustañ, fustañ, fustañ,  
Ar vugale vihan, vihan, vihan, vihan,  
Gant ur vazh tev, tev, tev, tev,  
'Giz ma gar.







---

## **Gouel laouen mammig**

Gouel laouen mammig,  
Ober a rin ur pok dit,  
Ober a rin dit ur bern pokoù  
Evit gouel ar mammoù.

*J. M. Salomon*



---

## Gwez

Gwelet em eus ar wezenn zerv  
O tañsal gant ar wezenn fav.



Klevet em eus ar wezenn gistin  
O kaozeal gant ar wezenn bin.



Kavet em eus ar wezenn bupli  
O labourat e-barzh ma zi.



Sikouret em eus ar wezenn onn  
O klask mont kuit diouzh ar puñs don.



Selaouet em eus ar wezenn gelvez  
O kanañ brav un ton nevez.

*J. M. Salomon*

---

# Unan hag unan



Unan hag unan  
E-kichen an tan.



Daou ha daou  
'Barzh ar c'hraou.



Tri ha tri  
'Barzh an ti.



Pevar ha pevar  
'Barzh ar c'harr.



Pemp ha pemp  
War an hent.



C'hwec'h ha c'hwec'h  
War an erc'h.



Seizh ha seizh  
'Barzh an neizh.



Aet e oant betek al loar  
Ha, distroet war an douar.

---

## An tren bihan

Tren, tren, tren bihan  
O tremen, o tremen  
Tren, tren, tren bihan  
O tremen 'kichen an hent



C'hoant 'n deus 'n tren bihan  
Mont da bourmen, mont da bourmen  
C'hoant 'n deus 'n tren bihan  
Mont da bourmen war an hent.





Chom, chom, tren bihan  
War al linenn, war al linenn  
Chom, chom, tren bihan  
'Rabat eo mont war an hent.


*J. M. Salomon*





# Pemp logodenn o c'hoari las

 Pemp logodenn o c'hoari las  
Degouezhet ganto ur pezh targazh  
Debret gantañ ul logodenn  
Peder 'zo bremañ war al leurenn.

Peder logodenn o c'hoari las  
Degouezhet ganto ur pezh targazh   
Debret gantañ ul logodenn  
Teir 'zo bremañ war al leurenn.

 Teir logodenn o c'hoari las  
Degouezhet ganto ur pezh targazh  
Debret gantañ ul logodenn  
Div 'zo bremañ war al leurenn.

Div logodenn o c'hoari las  
Degouezhet ganto ur pezh targazh   
Debret gantañ ul logodenn  
Un 'zo bremañ war al leurenn.

 Ul logodenn o c'hoari las  
Degouezhet ganti ur pezh targazh  
Debret gantañ al logodenn  
N'eus hini ebet ken war al leurenn.

Paourkaezh logodenn ! 

*M. Kerrain, J. Berthou*





---

## Ma vije

Ma vije brav an amzer,  
Ez ajen d'an aod. ... 

Ma 'z ajen d'an aod,  
Ez ajen war vor ... 

Ma 'z ajen war vor,  
Ez ajen da besketa ... 

Ma 'z ajen da besketa,  
E vijen lonket gant ur mell pesk ! 

Met glav a ra ... 

*J. Bourdonnec,  
M. Beauverger*

---

## Pa lakaan

Pa lakaan ma zog gris  
Ez eo 'vit mont da Bariz.

Pa lakaez da dog plouz  
Ez eo 'vit mont da d'Toulouz.

Pa lakaomp hon tog ront  
Ez eo 'vit mont d'an Henbont.

Pa lakait ho tog uhel  
Ez eo 'vit mont da Gêruhel.

Pa ne lakaer tog ebet  
Ez eo 'vit mont da gousket.

*M. Kerrain*

---

## Al logodenn

Peoc'h !

Emañ al logodenn o pourmen.

Diwall da vezañ tapet gant ar c'hazh !

**MARAÑ !**

Ar c'hazh 'n deus tapet al logodenn !

*J. Bourdonnec,  
M. Beauverger*



# Pa vezan ma-unan

Pa vezan ma-unan  
E lennan



Pa vezomp daou  
E kontomp gaou



Pa vezomp tri  
Ez eomp da c'hoari



Pa vezomp pevar  
Ne vez mann da lavar'



Ha pa vezomp pemp  
N'ez eomp ket da glemm

*M. Kerrain*



---

## **Dao dao dao**

Dao, dao, dao, piv 'zo aze ?

Dao, dao, dao, deuit tre

Dao, dao, dao, kit 'n ho koazez,

Dao, dao, dao, d'evañ ur banne kafe.

*M. Kerrain*



---

# Yann Bugul

- ✿ Ganet d'al lun
- ♥ Badezet d'ar meurzh
- ✿ Dimezet d'ar merc'her
- ✿ Klañvaet d'ar yaou
- ✿ Fallaet d'ar gwener
- ♥ Marv d'ar sadorn
- ♥ Douaret d'ar sul.
- ✿ Paourkaezh Yann Bugul.

*K. Ollivier*

# Kafe-bara-amanenn

Demat Mari !  
Petra 'faot deoc'h ?  
Kafe !  
Pehini ?  
Hini malet !  
'M eus ket bet  
Keno Mari



Demat Loeizig  
Petra 'faot deoc'h ?  
Bara !  
Pehini ?  
Hini krazet !  
'M eus ket bet  
Keno Loeizig



Demat Janig !  
Petra 'faot deoc'h ?  
Amanenn !  
Pehini ?  
Hini salet !  
'M eus ket bet  
Keno Janig.

*A. Boulle*



---

## **Pelec'h emañ?**

“Pelec'h 'mañ ma foñsined ?” a c'houlenn ar yar.

“N'emaint ket dindan ar wezenn”, eme an azen.

“N'emaint ket a-drek an ti”, eme ar c'hi.

“N'emaint ket dirak ar voger”, eme ar glesker.

“N'emaint ket war an doenn”, eme al logodenn.

“Aze 'maint, 'barzh ar bern foenn”,  
a huch ar vuzhugenn.

*J. Bourdonnec,  
M. Beauverger*




# Pegoulz

Pegoulz e teuio ar c'hazh?  
Pa zeuio al logodenn. 




Pegoulz e teuio al logodenn?  
Pa zeuio ar fourmaj. 




Pegoulz e teuio ar fourmaj?  
Pa vo kaset ganin. 




*Pegoulz ez in d'ar skol?*  
*Pa vi bras.* 



*Pegoulz e vin bras?*  
*Pa vi tri bloaz.* 



*Pegoulz am bo tri bloaz?*  
*A-benn ur bloaz.* 



*J. Bourdonnec,  
M. Beauverger*






# Perak ... peogwir

Lâr din Ploum, perak emhout o ouelañ   
Peogwir 'm eus poan.

Perak 'teus poan   
Peogwir on kouezhet.

Perak out kouezhet   
Peogwir e oa ur brank e-kreiz an hent.

Perak e oa ur brank e-kreiz an hent   
Peogwir e oa kouezhet eus ur wezenn.

Perak e oa kouezhet eus ur wezenn   
Peogwir e oa an avel o c'hwezhañ.

Perak e oa an avel o c'hwezhañ   
Peogwir e oa fuloret.

Perak e oa fuloret an avel   
Peogwir e oa glav.

Perak e oa glav   
Peogwir e oa koumoul en oabl.

Perak e oa koumoul en oabl   
Se, ne oaran ket!

J. M. Salomon



## Da belec'h 'maout 'vont ?

Demat ma dorn, da belec'h 'maout 'vont ?  
War an daol 'maon 'vont, da gemer ur c'hreion.

Demat kreion, da belec'h 'maout 'vont ?  
War ar c'haier 'maon 'vont, da dresañ ur ront.

Demat ront, da belec'h 'maout 'vont ?  
Betek ar rivier 'maon 'vont, da dreuziñ ar pont.

Demat pont, da belec'h 'maout 'vont ?  
Dreist al Leger 'maon 'vont, e kêr Lannuon.


Demat kêr Lannuon, da belec'h 'maout 'vont ?  
Amañ e chomin, re skuizh on.

*J. M. Salomon*

## Me an hini eo

Piv 'zo kouezhet diouzh e wele ?  
Me 'n hini eo.

 Piv en deus lonket laezh ar c'hazh ?  
Me 'n hini eo .

 Piv en deus torret e skudell ?  
Me 'n hini eo.

 Piv 'vo kaset er-maez ?  
Ar c'hazh 'n hini vo.



*J. Bourdonnec,  
M. Beauverger*






## Petra 'zo kaoz ?

Skuizh-brein on-me.

– Petra 'zo kaoz?

Al labour 'zo kaoz.



Klañv-bras on-me.

– Petra 'zo kaoz?

Ar c'hos 'zo kaoz.



Gwanik-gwan on-me.

– Petra 'zo kaoz ?

Ar c'hleñved 'zo kaoz.



Treut-ki on-me.

– Petra 'zo kaoz ?

An naon-bras 'zo kaoz.



Marv-mik on-me.

– Petra 'zo kaoz ?

Kit da ouiet ma zud kaer

Azezit aze àr ar gador

Hag e vo kontet deoc'h

Achumant an istor.

*A. Boulle, M. L. pochic,  
K. Ollivier*

---

Achumant    echumant  
Da ouiet    da c'houzout

---

## **Tour iliz Douarnenez**

Iliz Douarnenez he deus un tour :

– Setu tour iliz Douarnenez.

An tour en deus un horolaj :

– Setu horolaj tour iliz Douarnenez.


An horolaj en deus nadozioù :

– Setu nadozioù horolaj tour iliz Douarnenez.

*E. Serzhec*


---


## Ar bizied

An hini tevañ  
Eo hemañ 

An hini gwellañ  
Eo hemañ 

An hini brasañ  
Eo hemañ 

An hini bravañ  
Eo hemañ 

An hini bihanañ  
Eo hemañ   
Ha n'eo ket an hini sotañ.

## Ar biz-meud a lâr

Ar biz-meud a lâr:  
“Mat ar jeu, ma mamm ?  
Mat ar jeu, ma zad ?  
Mat ar jeu, ma breur bras ?  
Mat ar jeu, ma c'hoar vihan ?”  
Ganin-me, 'c'h a mat ivez

*M. Kerrain*



---

## Sell ouzh ar wezenn

Sell ouzh ar wezenn

Un aval 'zo enni

An hini kentañ 'n deus skoet warnañ

An eil 'n deus tapet anezhañ

An trede 'n deus peilhet anezhañ

Ar pevare 'n deus debret anezhañ

Ha ne chom tamm 'bet 'vit an hini bihan.

*J. Bourdonnec,  
M. Beauverger*





---

## **Kousket eo ar maligorn**

Kousket eo ar maligorn

Deus 'maez, brav eo an amzer

Ne blij ket an heol din

Deus 'maez, glav a ra

Erru on.

*M. Kerrain*

*Lâr 'ra an nen ar rimadell-mañ e viz-meud paket gantañ en e zorn. Dispaket 'vez ar biz-meud er fin.*



# Yezhadur

Kenveriañ .....	7 - 32 - 70
Renadenn an anv .....	69
Liester .....	16 - 18
Perc'hennañ .....	20 - 26 - 51 - 70
Anvioù-gwan .....	14 - 16 - 18
Gerioù lec'hiañ .....	12 - 15 - 29 - 30 - 45 - 46 - 60 - 65
Niveriñ .....	10 - 18 - 22 - 24 - 34 - 44 - 45 - 48

## Goulennoù :

Petra .....	8 - 12 - 68
Piv .....	56 - 66
Pegoulz .....	62
Penaos .....	10
Pehini .....	58
Pelec'h .....	24 - 29 - 60 - 65
Peogwir .....	64

## Araogennoù displeget :

Gant .....	11 - 48
En .....	72
War .....	72
A .....	72
Evit .....	7 - 26 - 28
Evel .....	12
Da .....	11 - 20 - 26 - 42 - 58 - 64 - 74

## Islavarennoù :

Pa .....	1 - 7 - 30 - 33 - 44 - 51 - 54
Ma .....	38 - 50

---

# Verboù

Amzer vremañ .....	7 - 14 - 65 - 68 - 69 - 70
Amzer da zont .....	10 - 26 - 28 - 29 - 32 - 34 - 38 - 42 - 60 - 62
Amzer dremenet .....	8 - 11 - 12 - 15 - 64 - 30
Amzer disheñvel .....	
Stumm ober .....	
Doare divizout .....	50 - 36
Stumm boaz .....	7 - 54 - 33
En ur .....	11
Stumm nac'h .....	8 - 58 - 60
Urzhioù .....	8 - 20 - 26 - 46
Bezañ .....	14 - 68 - 60 - 70
Dont .....	22
Mont .....	46
Kaout .....	14 - 69
Ober .....	42
Gallout .....	8

---

# Geriaoueg

## Troioù- lavar :

Diwall da .....	52
Arabat .....	46
Me an hini eo .....	66
Marteze .....	10
Doareoù seven .....	7 - 58 - 65 - 70
Ar c'horf .....	70 - 72
An dilhad .....	22 - 51
Boued .....	8 - 11 - 22 - 58 - 62
Ar familh .....	33 - 70
An devezh .....	33
Ar sizhun .....	57
An amzer .....	10 - 34 - 64 - 74
Loened .....	8 - 12 - 18 - 36 - 38 - 40 - 48 - 60 - 62 - 74
War an aod .....	38 - 50
War ar maez .....	12 - 15 - 44 - 60
Frouezh .....	22

## Gouelioù :

Nedeleg .....	26 - 28 - 29 - 30
Meurlarjez .....	36
Gouel ar mammoù .....	42
Devezh kentañ ar bloaz .....	32

---

# Taolenn

Devezh mat .....	7
Al lapin laer .....	8
Unan daou tri .....	10
Anna vari .....	11
Ar c'hazh hag al logodenn .....	12
Un ti bihan .....	14
Ar marc'h du .....	17
Ur chignan glas .....	19
Dek den du .....	18
Enora .....	20
O tont en dro .....	22
Daou gloc'h kozh .....	24
An tad Nedeleg .....	26
Nedeleg .....	28
Pelec'h emañ an tad Nedeleg .....	29
Nedeleg laouen .....	30
Kenavo .....	32
Da vintin pa savan .....	33
Ur maligorn .....	34
Meurlarjez .....	36
Ur yarig wenn .....	38
Al laouenanig .....	40
Gouel laouen mammig .....	42
Gwez .....	44
Unan hag unan .....	45
An tren bihan .....	46
Pemp logodenn o c'hoari las .....	48
Ma vefe .....	50
Pa lakaan .....	51
Al logodenn .....	52
Pa vezan ma-unan .....	54
Dav dav dav .....	56
Yann Bugul .....	57
Kafe bara amanenn .....	58
Pelec'h emañ .....	60
Pegoulz .....	62
Perak Peogwir .....	64
Da belec'h emañ 'vont .....	65
Me an hini eo .....	66
Petra zo kaoz .....	68
Tour iliz Douarnenez .....	69
Ar bizied .....	70
Ar biz-meud a lâr .....	70
An aval .....	72
Kousket eo ar maligorn .....	74